

**Perennes Urvan** (Treboul 1881 – Treboul 1947) Beleg  
**Pe Is ... pe Ahes ?** (Bet embannet e 1944).  
Modernaet eo bet an doare-skriva.

### **Taolenn**

Kan an Drouiz  
Malloz an Drouiz  
Hirvoud an Drouiz  
Mor-Vran hag Ahes  
Gwennole  
Glaz Ahes  
Evid echui

# I

## Kan an Drouiz

« Kanom an Eienenn  
A zo kresk d'ar wezenn,  
D'ar yeotenn teneridigez  
Ha diskan d'al labous  
En traoniennou didrouz :  
Skuilla 'ra yehed... levez

Kanom an Avel o yudal  
A dreuz ar hoadou don,  
Pe c'hoaz ar Gurun o strakal :  
Taran<sup>1</sup> 'ro nerz-kalon !  
Kanom ar Bann-heol, ar Barr-Glao  
A zo d'an douar frouez aho !

Hag an Drouiz koz a gane  
En e zav war lein an Arre.

\*

« Kanom, kanom an Tan !  
Kuzet er prenn er mean<sup>2</sup>  
'Mañ o para a-uz d'or penn  
Gwir elfenn, a vuhez ;  
Ha drezañ Teutates<sup>3</sup>  
A ro ha nerz ha sklêrijenn.

Kanom ar Hleze hag an Dir,  
Ar Gad, ar gwad o ruill !  
Kleze lemm da zivenn or gwir  
Ha d'e vinji<sup>4</sup> gand puill,  
Hesus<sup>5</sup> eo a ra 'r poblou kreñv  
Ha digabestr, dindan an neñv. »

\*

« Kanom on Tit kArret  
A vag tud ha loened  
Druz ha ken kaer en heol skeduz !  
Tirienn or Hentadou  
Goloet a goadou  
War e ribl ar mor peskeduz.

---

<sup>1</sup> Taran : **notenn gand an oberour** : Taran pe Taranis : Doue ar Gurun e-touez ar Halliz.

<sup>2</sup> mean : mên (leoneg, evid ar rim).

<sup>3</sup> Teutates : **notenn gand an oberour** : Teutates pe Tad an dud ; Doue braz Galliz.

<sup>4</sup> d'e vinji : ? Marteze : d'e veñji.

<sup>5</sup> Hesus : **notenn gand an oberour** : Hesus pe Esus : Doue ar Brezel.

Karom ivez ar Hentadou  
O galloud, o lealded.  
On tir eo poultren o horvou,  
O ene 'chom bepred.  
Keit ha ma vevo eun Drouiz  
E vezo meurveulet Galliz<sup>6</sup>. »

\*

« Kanom an Uhel-varr  
Lakeet war an douar  
'Vid pellaad peb droug, pep terzienn.  
Beleien an Dero  
Hebdale hen falho  
Gand ar falz aour war an Dervenn.

Kanom erfin ar Wir Furnez !  
Emañ skrivet er bed :  
Da bep steredenn Teutates  
En-deus merket e sked,  
Roudennet e hent da heuilla ;  
Ha da bep den, heveleb tra. »

Hag an Drouiz koz a gane  
En e zav war gorn ar Menez.

---

<sup>6</sup> Galliz : Galianed ( ? )

## II

### Malloz an Drouiz

Setu an Eienenn  
Saotret gand ar Hristen,  
Gand ar Breizad, er Vadeziant.  
Da ward d'or Feunteuniou  
E savont skeudennou,  
Skeudennou o zent diskiant.

An Avel a ra dezo krena,  
Pa ziroll ar mor braz ;  
Ar Gurun a ra dezo sponta,  
Pa strak, pa zev, pa laz.  
Heol pe Hlao – hervez o hredenn –  
A deu dezo war o fedenn. »

Hag an Drouiz a villige  
En e zav, war leur an Arre.

\*

« Emañ saotret an Tan  
O tevi heb ehan  
Dirag o aoteriou, klozet ;  
Ha tantad Mezeven  
Dre vennoz ar Hristen  
Hag e velein villiget.

O malloz a reont d'ar Hleze,  
D'an emgann ha d'ar Gwad,  
O prezeg peoh ha karantez  
'Touez an dud a youl-vad ;  
Ha ne ouzont – paotred ar Groaz  
Nemed eun dra : Soubla o skoaz ! »

\*

« Eul lodenn euz on Tir  
'Zo laeret 'eneb gwir  
Gand Breiziz, kristenien daonet ;  
An Arvor, tro-war-dro  
'Zo kabestret ganto.  
Emaint niveruz gwriennienn.

Tebet on-eus diouz or riblou  
Da zond 'kreiz an Argoa

Da glask Vorgan<sup>7</sup> hag ar hoadou  
Derhel penn d'ar Breizad.  
Ahes<sup>8</sup> 'zo pell ; e gadurien  
Ne raint netra 'vid on divenn. »

\*

Ha Teutates, zoken,  
Mestr pep tra ha peb den  
A zo nahet gand ar Hristen  
Evid Doue ar Groaz,  
Divroad – ouspenn c'hoaz –  
Divennour on enebourien.

Disprizet eo an Uhel-Varr  
Donezon Tad an dud ;  
Goapaad a reont he nerz dispar,  
Kredenn eru bobl a vrud.  
Ar blantenn zakr, hervez o foell  
Ne deo ken mad – d'ober skubell ! »

Hag an Drouiz a villige  
En e zav, war gern ar Menez.

---

<sup>7</sup> Vorgan : **notenn gand an oberour** : Vorgan pe Vorganium, Kêr-Ahes ar Vretoned (Karhez).

<sup>8</sup> Ahes : **notenn gand an oberour** : Actius a oa d'an ampoent e penn kadourien impalaer Rom e Br-Hall.

# Hirvoud an Drouiz

## III

« Gwelit an iliavenn  
‘Mañ c’hoaz war bemp delienn.  
Med gortozit nebeud amzer  
E welfot an ilio  
Astennet e skourro’  
Goloet gantañ an oll voger.

Ha bremañ ‘vid e ziskara  
Ho-pezo kalz a boan  
Ha na rit nemed e droha  
E vezo e vean<sup>9</sup> :  
Ne dalv ket troha e drojenn :  
Etre peb mên ez eus gwrizienn. »

\*

« An iliavenn eo Breiz  
O kreski deiz-ha-deiz,  
O kas skourrou ‘trezeg ennom.  
Oll hentou braz Arvor  
Wazr Vorgan ‘zo digor  
Hag heuillet int... ‘n em ziwallom !

Eun den a deu... eul lann a boulez,  
Ploueou a zav war-lerh.  
Emaint krog mad ! Beteg pegoulz ?  
‘Rabad eo chom dineh :  
Meneh o tond war-du ar Hoad,  
... Skilfou ilio e korv Argoad ! »

\*

« Gwall-nehed om neuze  
O weled, war ar gwez  
Distruj braz bouhilli Breiziz ;  
O kleved trouz alar  
Leh ma pigne sklear<sup>10</sup>  
Kan dour, kan labous, kan Drouiz !

« Ar hoad eo templ on Doueou,  
Liorz an Uhel-varr,  
Ar yeotenn-Aour, ar Feunteuniou  
Hag an Dervenn dispar.

---

<sup>9</sup> e vean : e vên (leoneg, evid ar rim). “en aner“.

<sup>10</sup> sklear : leoneg : sklêr

Med breset eo kement tra zakr  
Dindan treid ar Breizad fallagr ! »

\*

« E koad Brekilien  
Marzin, ar barz, zoken,  
'Zo gounezet d'an Aviel.  
Dond a ray eur mArre  
Ma kouezo an Arre  
Dindan galloud o ebestel.

Siwaz ! ar Hleze 'rank chom sioul !  
-N'o-deus nemed ar Groaz !-  
N'om ket loened gouez hag or youl  
Nemed kadour na laz.  
Da hounid bro – am-eus aon-me, -  
Muioh 'talv Kroaz eged Kleze ! »

\*

« Tarz war-lerh tarz, atao larkoh  
Ar mor-ze 'lonko ahanoh !  
A Gêr-Ahes hag a Halliz  
Ne chom nemed... Son Kêr-Iz,  
Ha c'hoaz... dihizet gand Breiziz ! »

Hga an Drouiz koz a ouele  
En e zav war gern ar Menez.

# MorVran hag Ahes

## IV

A-douez eur bobl tud<sup>11</sup>, e Vorgan,  
Eun den a zav, anvet Mor-Vran :  
Uhel e vent, teñval e zremm,  
Nerzuz e vreh hag e deod lemm,  
En e lagad luhadennou  
‘Vel e daoulagad an diaoulou ;  
E vouez krozuz ‘vel trouz ar mor,  
A zav neuze, a hwez fulor :

« Klevit, Galliz Ahes  
Ar pezh a lavar Teutates,  
Rag dre va mouez, an doueou  
A zivenn ho pro, ho Kwiriou :

\*

« Tavit, Drouiz koz an Arre !  
Re vuntret om ‘vid kaoud truez.  
An doueou ‘zo disprizet  
On daouarou a zo laeret,  
Or hoadou braz diframmet oll...  
A-walh eo ! Poent rei e zigoll  
D’ar Hristen, d’al laer, d’ar fallagr  
A zimegañs on oll draou sakr.

Daoust ha gwazed Ahes  
Ne vefent ‘ta nemed gwragez,  
Mad da neza e-tal an tan ?  
Alo, paotred ! War-zao, buan ! »

« Kêr-Ahes eo Kalon ar Vro :  
An oll hentou a gas eno.  
Ma lezom Breiziz da dostaad  
Emañ echu ganeom da vad.  
War ar gwasa penn eo dao skei  
‘Vid miroud outo da zistrei.  
War an tosta, skoom kaled  
Hag on Argoad a vo dalhet.

En hent, eta, en hent !  
Daoust hag ez om oaned hesent  
Mad da douza ‘vel ma kerer ?  
En hent, buan ! Maro d’al laer !

---

<sup>11</sup> eur bobl tud : eur boblad tud.



\*

« Aze, en tu all d'ar Hrannou,  
Meneh a stegn o antellou.  
Emañ er gwrizioù ar merien.  
Dihunit 'ta ! seh ar wezenn !  
Dihunit 'ta ! pobl an Argoad  
Pe 'varvo ho kredenn da vad :  
Setu er hoad, tud Gwennole  
Oh ober o labour noz-deiz.

D'an tan ha d'ar vouhal  
Al lannou hag o fennou moal !  
Sehed o-deus on taoliou-mên.  
Sehed o-deus a wad kristen ! »

« Bremañ, pa deñvalay an noz  
E kemerim hent ar "Gabros"<sup>12</sup>  
Dre an Uhelgoad, ar Hrannou.  
Kuzet dindan gwez ar hoadou,  
'Vel an heol a-dreñv ar goabrenn,  
Ni 'droho hent, - ne ouezo den –  
Neuze, pront 'vel an taol-kurun  
E kouezim warno 'kreiz o hun.

War ribl Steir hag Oded,  
Lezom Gralon koz da gousked.  
D'e lann, d'e dud, pa zihuno,  
Gouela ; dougen kañv a hello ! »

\*

Emaint en hent evel bleizi  
A glask kig kristen da zebri.  
'Vel diaoulou ez eont dre ar hoad ;  
O muzelloù a zunfe gwad  
Gand plijadur. En o haloun<sup>13</sup>,  
O vervi tan beo ar fioun.  
Ganto bouhilli, klezeier,  
Ez eont 'dreuz koad ha menezier.

Du-hont, er Hornaoueg,  
Setu bremañ Lan-Teveneg.  
Med ar Breizad 'zo war evez :  
'Mañ dindan gwarez ar Werhez.

---

<sup>12</sup> Gabros : **notenn gand an oberour** : Beg ar Havr. An ano kletieg eo "Gabros".

<sup>13</sup> haloun : leoneg, evid ar rim.

## V. Gwennole

El lann, 'meur pell diouz trouz ar bed.  
N'ez eus nemed labour, pedenn.  
Bemdez, e-doug ar bloaz, a-hed  
Ar reiz a zo : yun, pinijenn,  
Karantez 'tre ar vugale  
An tad eo Gwennole.

\*

Glander eun êl, sioulder eur zant,  
Den a galon ; en daoulagad  
E par an neñv ; baro arhant,  
Tal braz, nerzuz : setu an tad.  
En nozvez-mañ, en eun huñvre,  
E selaou mouez Doue :

\*

« Gwennole ! Klask da dierned<sup>14</sup>  
'Erru 'trezeg ennout, Mor-Vran  
Gand eur strollad a baganed.  
Emaint o tond euz a Vorgan.  
Warhoaz d'an noz, e vo ar bleiz  
O sailla war bro Vreiz.

\*

Ha Gwennole a vod e dud.  
A dro-war-dro int deut dezañ :  
Kadourien yaouank 'kreiz o brud  
A gar Doue, o Breiz, o lann.  
Neuze an tad, e zell warno,  
Da lavaroud dezo :

\*

« Meirion<sup>15</sup>, gwiskit prim ho terh<sup>16</sup> aour,  
Lemmit goafiou ha klezeier.  
Deoh eo da zivenn gwir ar paour :  
Feiz, buhez, ti ha parkeier.  
D'ho skoazella, ni a bedo,  
Ha Doue a dreho !

\*

---

<sup>14</sup> dierned : **notenn gand an oberour** : tiern = ozah.

<sup>15</sup> Meirion : **notenn gand an oberour** : liester "meriadeg" = "chef".

<sup>16</sup> terh : **notenn gand an oberour** : = collier (latin : torques).

« Gweloud a ran o tond, er hoad,  
Tud Ahes, merh hudur Gralon,  
Kleze 'n o dorn, tan en o gwad  
Ha gwall gounnar en o halon.  
Redeg a reont dindan ar gwez  
Da laerez or buhez.

\*

« Treuzit an dour, d'it d'o gedal,  
Kuzet dindan faou ar Hrannou.  
Med chomit sioul ! En noz teñval  
E klevoh trouz o hannedou.  
Lezit anezo da dostaad,  
Ha beh dezo da vad !

\*

« O Zeutates, dall ha bouzar,  
Ne wel anken, ne glev pedenn,  
Ne gemm netra war an douar.  
Eur wech, 'vid mad, greet al lezenn.  
Ar Hristen en-deus fiziañs, eñ,  
E burzudou Doue.

\*

Ha c'hwi, Gwerhez, Steredenn Splann,  
Roit nerz d'or halon ha d'or breh.  
Eur chapel, war leh an emgann  
Ho-pezo, ma roit deom an Treh !  
Oll, hen touom a vouez uhel  
Rouanez Breiz-Izel ! »

\*

« Oll he touom a vouez uhel : »  
Hag en em daolont d'an daoulin :  
« Ho pennoz deom, o ! tad santel,  
Tad Gwennole ! Warhoaz vintin,  
Dispont, nerzuz, on-devezo  
An treh. – pe ar maro.

## VI. Rumen-goll<sup>17</sup>

Breiziz, prim war o bagou skañv  
O-deus treuzet aber ster Aon.  
Sioul eo ar mor evel en hañv.

Bremañ e heullont ster ar “fao<sup>18</sup>”  
A bign d’ar hoad : red bale brao,  
Rag hebdale, an heol a zao.

Emaint erru en eun dachenn,  
Eur run – d’an ampoent, eur rumen ;  
‘Tre beteg an hent o tiskenn :

« Amañ ; tevh ar faouenned ;  
Gwelloh a ze e vim kuzet  
A-dreñv o zrojou arhantet.

Ouspenn, ahano e hellom  
Koueza warno, dievez ouzom,  
Pa heullint an hent en traoñ deom ;

O gwaska, e strad ar stankenn  
Hag o laza. N’hellint biken  
Sevel beteg war an dorgenn. »

Dindan an oabl steredennet  
Asamblez o-deus daoulinet,  
Oll, a-unan, o fedenn greet :

« Aotrou Doue, ‘maom en ho kward ;  
Ra vefem, oll, kreñv hag ampart.  
Divenn or buhez a raim stard.

« Gwerhez Vari, roit deom an treh,  
Kennerzit or halon, or breh :  
Evid ar Feiz eo, ‘maom e beh. »

Bremañ ‘sklêrra an noz teñval.  
A-dreñv ar faou ‘maint o hedat,  
Goaf en o dorn, youl war o zal.

Du-hont, war-du Menez Arre,  
Setu an oabl, a-uz d’ar gwez,  
O houlaoui gand ar beure.

Kerkent, e klever trouz boutou

---

<sup>17</sup> Rumen-goll : **notenn gand an oberour** :Rumen = Run. L’intervocalique *m* disparaît : *ruen*, par métathèse : *reun* ou *run*.

<sup>18</sup> fao : **notenn gand an oberour** : Ar Fao, devenu *Le Faou*.

O tond, a-dreuz an tervennou,  
Pell braz, c'hoaz ; ouz lein ar Hrannou,

Tostaad a reont ; hag er sioulder,  
Kadourien Vreiz a entent sklêr  
A voueziou ar gourdrouzou taer.

« 'Maint o tremen ! Harz ! Harz d'ar bleiz !  
Evid Doue ! Evid or Feiz !  
Evid or buhez hag or Breiz ! »

Ar foeltr ne sko ket buannoh,  
Na kounnar an tarz-noz kreñvoh  
Eged na sko paotred an dorh<sup>19</sup>.

E klever, euz lein ar hoadou  
O skiltra 'r goaf war ar skoedou,  
Taol ar hleze war houzougou.

Mor-Vran eo ar henta 'zalh penn.  
E gleze a faout, a zibenn...  
Netra ne dalv !... Lazet eo krenn.

E benn a ruill e fank an hent,  
E gorv 'zo flastret 'n e oll vent.  
E ene ?... d'an diaoul 'vel diagent !

Ar bleiz bremañ 'dro e koulin.  
Echu eo ganto da hoarzin,  
Prest int da goueza d'an daoulin.

Med paotred Breiz, pennou kaled  
A gendalh da laza bepred :  
N'hellou nikun Ahes gweled.

Abaoe koll ar Baganed  
Ar rummenn-ze 'zo bet anvet  
RUMENN-GOLL...- hag ez eo chomet.

'Mañ digor ar skluziou d'ar mor  
-Mor braz kristenien an Arvor  
A gerzo dre ar hoad, didorr.

Ha da gerzoud ne baouezo  
Nemed Ahes hudur maro,  
Beuzet dindannañ<sup>20</sup> 'vid atao.

Ar skluziou he-deus digoret,

---

<sup>19</sup> dorh : ?

<sup>20</sup> dindannañ : *dindanni* er skrid orin. Gourel eo *mor*.

E-pad m'edo Gralon kousket,  
Alhwez an tad ?... he zud lazet !

Sturerien Vreiz 'zo prest eno :  
Riwall, Kado, Edern, Telo,  
Gwazeg, Herbot... ped all ganto !

Poulzet ma'z int gand dorn Doue  
- Evel ar mor – youl ar Roue<sup>21</sup>  
'N-eus krog ebed en o askre.

Tonn war-lerh tonn ez eont d'ar hoad  
Da zegas Doue ar Breizad,  
Da zevel lano ha d'ober vad.

Diazezet war gein marh ar Roue,  
'Tre menez Du hag an Arre,  
Ahes 'zo beuzet er mor-se.

Euz he brasa pinvidigez :  
Templou, skeudennou, aour, perlez,  
Ne chom nemed... an eñvor gêz !

An tarz neuze a baouezas  
Da lonka bro, hag a reas  
*Eur feiz, eur bobl, eur yez, eur boaz.*

---

<sup>21</sup> ar Roue : **notenn gand an oberour** : Gralon, dizoursi, ne gemmfe netra e Vorgan, dre spont rag ar Romaned, pe marteze, dre zoujañs outo.

## VII. – Glaz Ahes

« Kan ! manah Lan-Tevenneg  
Kan ‘vid ar Vretoned  
An traou ‘zo bet pennabeg  
Da Vreiz beza brudet. »  
Hag ar manah, gand evez,  
A zavas ar zon-mañ,  
A gonte doare Ahes,  
Hag heh eur diwezañ :

LIVADENN GÊR-IZ (*Barzaz Breiz : Livadenn Gê-Iz*)

« Hag’ e klevas-te, hag e klevas-te  
Pez a lavaras den Doue  
D’ar roue Gralon en Iz be’ ?

Arabad eo en em barad !  
Arabad eo arabadiad !  
Goude levez, kalonad !

Neb a beg e kig ar pesked  
Gand ar pesked a vo peget ;  
Ha neb a lonk a vo lonket.

Ha neb a ev, ha gwin a vesk,  
A eva dour evel eur pesk ;  
Ha neb na oar a gavo desk. »

\*

Ar roue Gralon a venne :  
« Koanourien da, da eo gane<sup>22</sup>  
Moned da gouski eur banne. »

« Da gouski ‘afeh antronoz.  
Manet-hu ganeom fenez :  
Hogen, pa vennit-hu, bennoz ! »

Serheg a gomze war ma oue<sup>23</sup>  
Flourig-flour ouz merh ar roue :  
« Klouar Ahes<sup>24</sup>, hag an alhwe’ ? »

« An alhwez a vezo tennet ;  
Ar puñs a vezo dibrennet,  
Pez a youlit-hu, ra vo greet ! »

---

<sup>22</sup> gane : ganeoh.

<sup>23</sup> oue : oueze.

<sup>24</sup> Ahes : **notenn gand an oberour** : pe : Dahud.

\*

Hag an neb en-defe gwelet  
Ar roue koz war e gousked,  
Meurbed 'vije bet souezet.

Souezet gand e bali moug  
Hag e vleo gwenn-kann war e chouk,  
E alhwez aour e kerh e houg.

Neb a vije bet er heden<sup>25</sup>  
En-defe gwelet ar verh wenn,  
Goustad o vond tre, diarhen.

Tostaad 'ree ouz he zad roue,  
Ha war he daoulin 'n em stoue  
Ha ribla sug hag alhwe'.

\*

Atao e hun ; e hun an her<sup>26</sup>  
Ken a gleved 'hed al laouer :  
« Laosket ar puñs ! beuzet ar gêr ! »

« Aotrou roue ! sav diallen<sup>27</sup>  
Ha war da varh ! ha kuit a-grenn !  
Ma 'r mor o redeg dreist e lenn ! »

Bezeta milliget ar verh wenn  
A zialhwezas, goude koen<sup>28</sup>  
Gorre puñs Kêr-Iz, mor termen<sup>29</sup> !

\*

« Koadour, koadour, lavar din-me  
Marh gouez Gralon a welas-te  
O vond e-biou gand ar zaon<sup>30</sup>-me ? »

« Marh Gralon dre-mañ ne welis  
Nemed en noz du e glevis :  
*Trip, trep, trip, trep, trip, trip* ; tan tiz<sup>31</sup> ! »

« 'Gwelas-te mor-verh, pesketour,  
O kriba he bleo melen-aour  
Dre an heol splann, e ribl an dour ? »

---

<sup>25</sup> er hedenn : war-hed

<sup>26</sup> an her : ar roue.

<sup>27</sup> diallen (?) : alese.

<sup>28</sup> koen : koan

<sup>29</sup> mor termen : gloued ar mor.

<sup>30</sup> ar zaon : ar zaonenn.

<sup>31</sup> tan tiz : tiz an tan.



« Gweloud a ris ar mor-verh wenn ;  
M'he hlevis o kana, zoken :  
Klemmvanuz tonn ha kanaouenn<sup>32</sup>. »

---

<sup>32</sup> Klemmvanuz tonn ha kanaouenn : klemmvanuz e oa ar mor hag he hanaouenn.

## VIII. Evid echui

Eet eo *Vorgan* da vorganez.  
Ne glever ken kleier Ahes !  
Kleier a zon !... *Re ar Werhez !*

N'eus korn ebed a Vreiz-Izel  
'Leh n'he-defe ket he chapel :  
Eno, kleier he meul uhel.

Keit ha ma sonint en oabl glaz  
N'o-do biken da dintal glaz  
D'or Breiz, splannoh eged biskoaz !

Gwerhez Rumenn-goll, Mamm ar Vro  
Pep Breizad bepred az karo  
Ha d'az pedi ne ehano.

E. PERENNES  
Beleg

Treboul : 7 a viz Kerzu 1943.

**Notenn gand Embann an Hirwaz** : Hag-eñ e skrivfe kement-se bremañ (e 2014) ?